

MA MAMM

Da VARI AN DRU
marvet da dregont vloaz
F. G.

Setu-me rentet en termen,
Eur vuhez meurbed diskempenn.
Beteg amañ 'm-eus greet netra,
Med ruill ha diruill peadra.
Poent braz eo din lakaad en reñk,
Traou tremenet, re dous ha treñk :
Mez n'hellan ket leda va dram
Mez komz da genta deuz va mamm.

Rag tra 'oa beo, en pep plegenn
Va mamm a deue d'am helenn,
Ha da rei din skoazell dalhmad,
Hervez he galloud hag he stad.
Sod 'oa ganin ha me ganti !
Kaerra doare, pevez dudi !
Evel-se kredabl tamm-ha-tamm,
Me 'garfe muioh-mui ma mamm.

Me 'oa ganet er Gêr-Nevez,
Du-hont tre war ribl ar menez,
C'hwez ar bleun brug, lann ha balan,
Am heuill bered h va distan ;
Parroz frank Berrien eo ma bro,
Gand he lannou, reier, koajo' ;
Pont ar Rousig, Gwaz an hent kamm,
A zon em fenn gand mouez ma mamm.

Eno on savet dibreder,
En eun draoñienn leun a gaerder ;
Leh dre forz sacha war ar vronn,
On deuet da veza eur paotr sonn,
Ha koulskoude 'oan ket dineh,
En despet din santen ar beh,
Deuz an oaled pri a ziframm,
'Kreiz ar bugel a goll e vamm.

Soñj mad am-esu ; o ! mamm garet,
Em bugaleaj tremenet,
Pa oas e penn an tiegez,
O rei dim nerz ha levenez !
Em hreiz bepred 'ma o vervi,
Ar memez gawd 'vel da hini.
Te 'oa plah lemm, mibin ha flamm,
Ouzit on heñvel-beo, ma mamm.

Soñj am-eus c'hoaz, ha me bugel,
Pa ouelen doureg em havell,
Gand eur pok 'sehes ma daero'.
Allaz ! prag out-te maro ?
Ma vijes bet ganen hirie,
Va dizankeniet az-pije.
O ! traou Doue ! pegen estlamm,
'Oa din koll ken abred, ma mamm.

Abaoe, me 'm-eus redet bro,
Ha greet ganen meur a gil-dro ;
Klozet marhajou mad ha fall,
'Vel m'o-deus greet berniou tud all.
Mez kreñvoh kalz me 'vije bet,
Mar bije bevet hed-ha-hed,
'Tal kichenn va zad ken divlamm,
Ar plah iskiz e oa ma mamm.

N'eus forz ! ar pezh 'zo greet 'zo greet.
Kaoud keun war-lerh 'dalv mann ebed ;
An oll hentchou a gas da Rom,
Ha tra ma chomo ma fenn 'n e blomm,
Me 'lako c'hoaz an traou da gerz,
Rag 'hann da bell me 'gred 'mo nerz,
Da zibrada pounnerroh samm,
O soñjal en ennout, ma mamm.

Pa oan bugel ouzin êl mad ;
Ha bremañ pa'z on deut en oad.
Te 'vo din ar wir skêrijenn,
Am reno c'hoaz er wenojenn,
Leh na 'n-eus ket a skoasellou !
Neuze keno d'an trubuillou !
Pa 'mo greet krohenn nevez-flamm,
O senti deuz furnez ma mamm.

Du-mañ, ma 'z eien da eured,
Gand da walenn aour dastumet
Kempenn er pres, leh na zeu den
Da ober sellou fall ha vên.
An teñzoriou 'teus roet din,
'Chomo ganen beteg an fin,
Spered digor, ene dinamm,
Daou dra ken kaer 'devoa ma mamm.

En an' Doue, va douaret,
Dindan ar gwez braz er vered,
Leh eo kousket ma zudou-koz,
E douar santel ma farrez.

War an uhel en eun toull goueñv^[1],
Leh 'ma tud stenn an avel greñv,
Rag beteg em diweza lamm,
E fell din koueza tost d'am mamm.

Pa zono an eur diweza
Pa zeredo d'am skoazella,
Da derri din aken ha poan,
Evel ma'z-peus greet pa oan bihan !
Da skeud hepken 'uz da vugel !
Ha me ne zantin ket mervel !
Da vouez tener 'vo eun dizamm,
An den dalhmad a houl' e vamm.

Peurgan

Krog en da zorn, me 'hall dineh
Serz war da lerh beteg an nerh ;
E-leh n'ez eus na deiz na noz ;
Leh emañ ar gwir baradoz ;
Pell deuz ar bed hag e hlahar,
'N eun dachenn frank ha kaer dispar,
'N eur gana c'hoaz a vouez uhel,
Meuleudiou da Vreiz-Izel.

Sur ne vefont ket disprizet,
Gand Doue, Snt ar Sentezed,
Ganit, mamm 'redo sklêr 'vel an dour,
A ruill ken brao en o steriou
A dreuz kemend a zouarou,
'N o daou du bleuniou alaouret,
Hag en o zouez kan lapoused.

Keno 'ta, mamm, en eürusted !

D'ar 15 a viz Mae 1926.

^[1] goueñv : ?